

**Baccalauréat Général**

**BRETON**

**Série L – Langue Vivante 2**

**Durée : 3 heures  
Coefficient : 4**

**L'usage du dictionnaire et de tout matériel électronique ou informatique est interdit.**

**ATTENTION : LE CANDIDAT DOIT REPORTER L'INTEGRALITE DES REPONSES (COMPREHENSION ET EXPRESSION) SUR LA COPIE D'EXAMEN.**

**Avant de composer, le candidat s'assurera que le sujet comporte bien 3 pages numérotées de 1/3 à 3/3.**

Ha kaer an amzer oc'hpenn<sup>1</sup>

Àr-lerc'h an oferenn e oa bet douget Job betek e di diwezhañ. E bevar c'henseurt a oa bet goulennet da zougen an arched.

« Klevet ho peus, » a lâre Gabi, « ar pezh a lâre an aotrou person : e veze gwelet aliesoc'h er '*chapel*' evit en iliz ! N'eo ket traoù da lâret alkent<sup>2</sup> ! »

Goude an interamant e oa ar c'hafe, evit an dud kar hag ar vignoned tostañ. Job a lâre bepred :

« Pa vo ma zro din monet kuit e faota<sup>3</sup> din ma vo graet ur c'hafe hag unan 'ag ar choaz<sup>4</sup> » ! Ha ne faota ket ma vankay netra<sup>5</sup> ! »

Gwir eo ne vanke netra, gwin gwenn, charkuterezh, gwin ruz, katev<sup>6</sup>, ur bannac'h hani<sup>7</sup>-kreñv evit roiñ liv ar c'hafe. Fiskal<sup>8</sup> e oa.

An dud, tristaet get ar c'hañv douget da Job, a chomas didrouz a-gentañ, met, a vuzul ma yae e komañse an teodoù da c'hlebiñ hag ar begoù da zivergliñ<sup>9</sup>. Ar c'herentaj n'o dezhe ket tro d'en em gavet èl-se<sup>10</sup> alies. A-raok ar fin e oa prest ar muiañ da ganal (met den n'en doa kredet gober<sup>11</sup> !)

Tud ar c'horve oa bet kinniget dezhe un tammig argant-butun met ne faota ket dezhe kemeret : setu e oa bet roet dezhe peder boutailhad gwin Bourdel ... a oa bet evet.

A-raok distag e raas ar pevar c'hamarad tro tavarnioù ar vourc'h ha kanal a oa bet graet.

« Lâ-lâ-lâret en doa Jo, Job : 'den trist ebet' ! »

Balbouzat a rae Louis ; diaes e oa daet an distrip<sup>12</sup>. Ar re 'rall a oa erru samsom-mat ivez. Un interamant bourrapl<sup>13</sup> en doa bet Job Klañch, ha kaer an amzer oc'hpenn !

D'ar Yaou 2 a viz an Azvent e veze lennet àr ar Journal :

« Dimerc'her vintin, àr-dro 3 eur, en deus kollet an aotrou Le Maout, 49 blez, mestroniezh e garr, er lec'h anvet Kerchopin. Aet eo ar c'harr en ur peul tredan. An tri den a oa getañ a zo bet lazhet àr an taol : an aotrounez Le Moal, 50 vlez, menuzer, Louis Konan, 54 blez ha Marsel Kopaneg, 52 vlez. Ar c'honduour, gouliet-kriz, a zo tremenet en ospital. Re founnabl e yae, doc'h<sup>14</sup> ma seblant, an oto. An alkohol ivez a hañval bout penn-kaoz d'ar gwallzarvoud mantrus-mañ : etre 3 ha 4 gram evit pep unan anezhe. E tonet ag un interamant e oant ...

Daniel DOUJET, Ur c'hi maget mat ha danevelloù all  
*Lakañ unan arall da Job !*, Al Lañv 2000

---

<sup>1</sup> oc'hpenn : ouzhpenn

<sup>2</sup> Alkent = evelkent, memestra, alato

<sup>3</sup> e faota din = e fell din

<sup>4</sup> ag ar choaz = eus ar c'hentañ choaz

<sup>5</sup> ne faota ket e vankay netra : arabat e vanko netra

<sup>6</sup> katev : kouign, gwastell

<sup>7</sup> kani = hini

<sup>8</sup> fiskal : deus ar c'hentañ

<sup>9</sup> mergl = rouille

<sup>10</sup> èl-se = evel-se

<sup>11</sup> gober = ober

<sup>12</sup> diaes oa daet an distrip : diaes e kave distagañ

<sup>13</sup> bourrapl : plijus

<sup>14</sup> doc'h = diouzh

## 1. Kompren

8 poent

### Respont gant ur frazenn

1. Evit peseurt darvoud emañ bodet an dud ?
2. Pet mignon en devoa Job ?
3. E-menn (pelec'h) emañ kaset Job ?
4. Petra eo ar ' chapel ' a zisplij d'an aotrou person ?
5. Perak e vez kinniget ur c'hafe goude an interamant ?
6. Evit piv eo bet fardet ar c'hafe ?
7. Perak e chom didrouz an dud ?
8. Perak n'o deus ket kredet an dud kanal e-pad ar pred ?
9. Petra eo ar c'horve ?
10. Perak e oa mezv tud ar c'horve ?
11. E peseurt stad eo erru mignoned Job ?
12. Petra o deus graet mignoned Job à lerc'h (war lerc'h) ar c'hafe ?
13. Penaos eo digouezhet ar gwallzarvoud ?
14. Pet den oa e-barzh an oto ?
15. Ha lazhet int bet tout àr an taol ?

## 2. Treiñ

2 boent

Troet adalek « An dud tristaet ... a oa bet evet ! »

## Pennad-skrid

10 poent

1. Er gazetenn emañ kontet interamant Job Klañch. Skrivit ar pennad.
2. Reizh e kavet e vije un tamm plijadur da zevezh un interamant ? Displegit ho soñj.
3. Kalz mojennoù zo diàr-benn ar marv e Breizh hag er broioù arall (all). Marteze e anavit unan. Kontit.